

ANN DIROBE KARLANTEZ HA ZON ANN TREBE

VOAR DON : *Ar C'hoq*

Ann eisvet a vis geuengob.
 Ma guisket ma boto tano
 Vit mont d'ober ann dirobe
 En ker ar Roc'h oar ar pave
 Dre m'oa gret assinasion
 Gant eur plac'h iaouank a fesson
 Pa oa distribuet ar prijo,
 A klevis son ar binnio,
 Ar pifer hac ann taboulin,
 Bombard kerne, o zon lirzin
 Evit dastum ar iaouankis
 Da lampad peb hini n'he c'his.
 Krog eo ar bombard, kamaradet,
 Poent eo din klask danserezet ;
 Deub oar draou hon tri assambles,
 Me haneve ter danseres.
 Merc'hed a oar touch ar zon
 Ha dond en dro oar ho zalon.
 Me oa bet faizet de foar Vre
 Ben ma oa fin d'ann dirobe ;
 Trempet dre cr'hoazan ma dillad
 O treignan merc'hed Louargat.
 Breman tog monet da dansal
 Me glasko eur plac'h dishual.
 En traou ar ru en pen ar pont
 A memb bed ar chans d'ho rancontr
 Sellet aze, kamaradet,
 Ter danserez di-hualet,
 Kroguet peb hini vis a vis,
 Me ha gant plac'h he Javanger gris,
 Unan deus ma c'hamarado
 Oa neve ari bars er vro,
 En deus lavaret en gallek
 Ne ket mad pezh a bresantet,
 N'hei ket ganti c'hoas ann dro-man
 Ma c'helfomp gvel n'eum isplikan.
 N'eo ket eur merk umilite
 Goul eur plac'h en creis assamble,

- 3 -

Heb goud doare en neb fesson
Ha di deveus assinasion ;
Mar deus promesse merc'hed Langoat
Vezo kabested potred Prat.

A boe pardon Santez-Aunan
A moa prometet dond aman,
D'ober eun dans gant Marivon,
Gredan ket rafe traïson,
Mar keret mont ganti da dansal,
Me c'houlennno unan ann diou all:
Dislarao man deus-kement-se,
Mar be kontant me zo ive,
Ed oc'h unan d'ho zaludin
Ha konte t evidomp hon tri ;
Guel eo laboural a dol zur
Vit riskan kaet guel avantur.

10
Kever d'ar blomen, dar blas ker,
A mens saludet n'he o zer ;
Komzet a meus ken excellent
Ma c'homp n'em gaet hon c'hoer'h kontant
D'antrén assaible bars ann dans,
Vit enr barti rejouissans,
Bale coubled ha ba'ansin,
Chanj hon merc'hed, n'enn rekrein.
Plijadur a moamb da voersau ;
Ha danzo gratis heb pean ;
Ha p'arrete ar zoubrien
A lekemb oll peb a brisen.

Goude ar bederved zon dans,
Me meus bet eun tam disfi'ns,
Kær e moa zellet tro ar leis
Voelen ken Marivon na Louis ;
Ar veach-man me zo manquet,
Laket ar bleiz gant ma deaved.

Homan eo dans ann dirobe
Læret ma fi c'h dre finesse
Henes, vit klevet he gomzo,
Fontle ket ar sukr n'he c'heno,
Ha n'eus tapet krog en he brec'h
Deus kemeret o daou ann tec'h.

Ha me laret d'am danserez
Mersi deus he c'hompagnunez ;
Prenan dezi eun doussen ber,

Kemer ma huan hent ar **guer**,
Da vont beteg ti **Marivon**
Da glevet suit ann draïson.

Bars ann ti pa c'hon anireet,
Kurius he meus gouennet
Pelec'h a mon plac'h ann danso,
Vit komz ganti m'ar gweo distro.
Gweo, man duze bars ann ti traon
Eun tam zo eu konvers ho daou.

Bars deg munuten d'ar goude,
C'hantre tud iaouank ar c'hontre,
Hag a zo zavet komz bakri
Deus eur c'has taguet gant eur c'hi ;
Me guemeras pront ann trebe,
Komans da zon gant ma alc'hue,

Me moa eur blijadur nec'het,
Rac ma c'halon a oa karguet ;
Guelet renken son ann trebe
Goude ober propriete ;
Roet eur vonen deus ma dorn,
Hag eun all a lipad m'askorn.

Kuset ann eol, tost da nos
Oa bras m'eo fini-set ho c'hos ;
Poent d'ar plac'h moat da c'hourou'rzeout,
Oelen a ve gret lil gant Glaout,
O vont er mes gant he c'helorn
A meus tapet krog en he dorn,

Terrubl oc'h fier merc'h iaouanq,
N'andreet eun den ken obligeant ;
Me a meus gret propriete
Ha dec'h a dud ma c'hontre,
Ha breman, vit ma rekompans,
Na gavan nem et dismeguans,

Penos dismegueans, ma mignon,
C'hui zo kiriek d'aan draïson ;
Prometet moamb, m'ar meus sonj mad,
De pardon Santez-Anna Prad,
Erruout en ker ar Roc'h da dansal,
Laris ket dac'h elask deñ eun all.

Me moa proposet d'aan d'en-ze,
Dre ma oa en societe
Monet guenac'h da dansal.
Dre n'anvee ket ann diou all,

Hag aon rag bean refuset,
Evel m'oa d'ac'h espliket.
Me a meus gret ho polante
Hep aneveout ho c'hide,
Poa ket desir da dont ganin,
Pa rec'h ofr da n'eum ramplasin ;
Mes klevet libr ma zantimant :
Fin zo entrezomp, den iaouank.

Zantimant merc'hed Breiz-Izel
Zo variant vel ann avel ;
Daou via so en eum darempred,
Divoar ben netra separet.
Nijet eo pront oc'h amitie
Goude ken liez promesse.
Promesseo gret de c'heno,
Histoario ven, kontadello,
Ren-da-ren vel patr ar c'has,
So treo hep mirit a viskoas
Guel eo marc'had gred en eur c'hrog
Vit daou vlavez contan fagod.

23
Mar gued breman en priadelez
Me a mezo eur garlantez,
Vit ma retornin ken aman,
Reid aze ar pezh a zo dean :
Ann alians, hag ar mouchouer
Ma prenet dec'h en fear Dreguer.

Kement-se so just ha gleet,
Ho treo zo ganin preparet,
Mar man ma goest en ho kodel,
A veson kuit hep dale pel ;
Dalet ho treo, reit din ma goest
Na leret ket a vin n'ho rest.

Noz vad dec'h plac'h iaouank fier,
Me gred ann oad hag ann amzer
Digasso dec'h umilite ;
Gras ma po chaus ha c'hir vue,
Union vad n'ho tiegues
Rag re, zivoas ! a zo dies
Bars pemzec devez d'ar goude,
D'ar zul vintin deus ma guele,
Me a vele eurs gurunen
Dirag ma zi en beg eur voëen,
Dec'h o dimet Marivon
Hag a meus bet lod er pardon.

Cetu eur guentel excellent,
Kelennadurez tud iaouank :
Pa pezo gret assination,
Ret ket a renk d'ho mignon,
Gant aon rafac'h zon ann trebe,
Ha kad eur garlandez goude.

Breman tud farsus ma c'hontre
Ra goab ac'hanou noz ha de ;
Mes n'on tam mui konstristet,
N'eo ket dimet tout ar merc'net :
Mar zo laket unan em lod,
Me date'ho mad ma me c'hoas krog.

31 Nep a neus rimet ar chanson
A zo hanvet Pier RAISON,
Ganet hon en Pleuveur-Gotier
En loien eur paour labourer,
Na nelo a nag aour nag arc'hant,
Ha meus renket chom ignorant.

P. R.

CHANSON NEVEZ

VOAR SUJET

EUR C'HLOAREK HAG HE VESTREZ

(Voar eun ton anaveet.)

Ma mije eur c'hreñon, pluen, liou ha paper,
Da gomposin eur zon me lakje ma amzer, (bis.)
Da gomposin eur zon din ha d'am mestrez koant
Deus plantet em c'halon eur boquet a dourmant, (bis.)
Me moa gret ma studi evit beza beleg
O re garout eur plac'h, me meus amzer gollet, (bis.)
Ma meus amzer gollet me na non ket fachtet
Me a meus gret al lez da fluren ar merc'hed, (bis.)
Da fleuren ar merc'hed hep drouk komz anezin,
Na kafin ket he far dre lez ma valein, (bis.)
Ma mestrez zo c'hanval deus eur planten romani
Pe vel eur rosen ru pa ve o tiguern, (bis.)
Pe vel eur m-l-zour ka gret a sklerigen ;
Neus ket voar ann douar a gueroch temeulen, (bis.)
Ar greun deus ar raden a zo di s da gavet
Meur a hini o gouel ha no c'hanavout ket, (bis.)
Kalonik ma mestres a zo pareillamant,

Biskoas na meus gallet klevet he santimand. (bis.)
 Biskoas na meus gallet klevet he bolante.
 C'henep he zantimant me a c'he di bemde. (bis.)
 Me c'ha c'hoaz eur veach beteg ti ma mestres
 Ha pa gollen ma foan gret a meus alies (bis)
 Ha pa gollen ma foan, alies a meus gret
 An dud a lavar din a meus amzer gollet. (bis.)
 Penevert a meus aon rag b zo avavet
 En guis d'eur rossignol, vijem n'em degniset (bis.)
 Tad ar sperejo ma b, gouarnar ar bed oll,
 Roet din diou askel ha tail eur rossignol, (bis.)
 Me voel ma mestrezik, ne jardin n'em guzet
 Glac'haret he c'halon, o plantan eur boket. (bis.)
 O plantan eur boket de meus a lozouto
 D'ober he c'hurunen en devez a c'hirio. (bis.)
 Me a blanto eun all deus a flourio neve
 Da ober ma hini tri devez de goude. (bis.)
 Me voel ma mestres diudan eur laureen
 Hag imaj ar Verc'hez gant-hi oar he barlen, (bis.)
 Hag eur crucifi gant-hi en he cherchen
 Ha gouelan ra out-he evel eur Vadalen, (bis.)
 Salut dec'h, ma mestrez rouanez ar guenet,
 Achu eo ma studi, distro hon d'ho cuelet (bis.)
 Me a sonje ganin, parujach bars er guer,
 Evijac'h bars en Frans, procurer pe noter (bis.)
 A vijac'h bars en Frans, procurer pe avoue
 Seljec'h ket eus eur plach ken distra a me (bis.)
 A pa vjen en Frans Procurer pe avoue
 Me deuje d'ho cuelet pa mije liberte (bis.)
 Hag a vijac'h en hent o klack bara beunde
 Kredet, me o c'heureuche a greis ar baourante. (bis.)
 Ho tad a skrive din oar gornik he lizer
 Desir nemert d'hon da vezan he verc'h ker (bis.)
 Desir nemert d'hon en he di da vestrez
 Ma na delen a vado, me dele a turnes (bis.)
 Ha me ha mia lign-oll a c'homb en em glevet
 Pa vezo o polaste a vezomb dimezet (bis.)
 Ma zud zo arri koz hag hep capacite,
 No abandonin ket en ho neccessite (bis.)
 Leret din, ma mestrez, rouanez ar guenet.
 Goude maro ho tud pelec'h effeti. (bis.)
 Goude maro ma zud, me esper en Doue
 Hennes am c'hondua herves he volante. (bis.)
 Ma zud a zo paour mo dijen bet moï-n
 Me vijen leanez diudan eun habit guen. (bis.)

Mar gueo da leanez he tesiret monet
 Me o creñ leanez a be gousfe mil skouet (*bis.*)
 C'hui a vo leanez a me a vo bel k
 Adieu d'an amourousted, reno comp cren d'ar bed (*bis.*)
 Gras dimp d'en em voelet goude fin hon huc
 Enn pales ann Drindet hed an eternite. (*bis.*) P. R.

CHANSON

PIPI HA MICHEL VAKON, KINDIRVI

Voar eun ton anavezet

Arretet oll, tud iaouank, deus parous Tredarzek,
 Da g'levet kanan eur chanson zo neve composet
 Voar sujet Pipi Vakon, statu dillat ha plous
 Enn bilajen ann Traou-Meur neus laket kals a drous.
 Pipi ne ket iaouank, na neubent Michel,
 Boe meus anaoudegues en traouien Breiz-Yzel,
 A voelan fourmi Vakon en pilajenno'r Preskil
 Gant tud iaouank ma chanta vit ober bouft ail.

Pa voeler merc'hed iaouank vale'n assembleo
 Pere n'o deus ket a chang da gad kamarado ;
 Tud iaouank ho bilajen, vit n'em divertissan
 A form deze Pipi Vakon d'ho lakaat da viskan.
 Pipi zo evel eur gaouen ve en nos o vale
 Me gred din eo lunatik neket sellet ann de ;
 Pa ve savet an merc'hed ve prisonniet Pipi
 Goude bean hed ann noz n' faction oar c'ro n' ti

Hen deket avis guenvour zo savet joi ha kri
 En bilajen ann Traou-meur ez eo plaset Pipi ;
 Vel eur monark redoutet, ne sav eus ar pignon,
 Digor gant-an he zivrech da receo he itron.
 Unan ar merc'hed iaouank, mintin er mes he zi,
 Zo manet zouezet da zellet ous Pipi ;
 Kerc'hed e deus ar golo dimeus ann ti n'essan
 Da voelet petra, zivoas ! a zo stignet aman.

Pipi pa voel ar golo neus bet eun dromlezon
 Arri ver d'am diguemer, zavet eo ann itron,
 Ma vezo regalet m'ar me he grasso mad
 Breman het da g'levet, eman nevens bet koad.
 Eur miliner ansien, n'em gavet da dremen
 Hag a zo bet regalet vit zicour enn disken ;

Treignet eo Pipi d'ann ti diframmet he vembro
 Vit mad ar gommunote he goarzet he vado.
 Ann hini goz a lere ne c'hoas n'he goele,
 Laket dour oar ann tan ma vezo gred kafe ;
 Ma c'hefomq peba vanie'h da iec'het an otro
 Ma na bez ket ar skoden vo goerzet he vrago.
 Er c'henta occasion he zilla't zo guerzet
 Gret ar marc'had *gré à gré* ar som a dri goennec ;
 Cetu ann histoar truezus deus goeladen Pipi
 Breman entre ar merc'het zo zavet fachiri.
 Ann eil de pen a damal camaradez Vacon
 Ha na c'houl den konsantin d'ar sort pretansion.
 Dre ze zo bet suposet ma vije gret eun all
 Ma defo peb a unan a kuit d'en em damal.
 Bars ar memes bilajen, oar b'n eiz de goude.
 C'harrias Michel Vacon eur c'hinderv d'eguile,
 C'hemant zo bet finoc'h ed en bek eur voen,
 Ha ker e oa en hijan, n'allet ket en disquen
 O tremen en Lundreguer, tud a dost hag ha bel
 Tout ha defoa phjadur o sellet ouz Michel,
 Mes me tez da soujal en malis ar merc'het
 O velet eun dra iskis dirag ann oli plassen.
 Klasket e n'ol noieun d'en di ken ac'hane,
 Dre fors invansiono eo caet a finesse ;
 Skoet so eur c'hrok ennan, gant malis dindan verc'h.
 Forset Michel da goesan hag e tertas e vrec'h.
 Ar vrec'h-se zo c'hoas chommet bars ar voen vit test.
 Breman entre er merc'het cojou d'ere a vesk
 Bed a zo kan a gourdrous, rogatek kotillon
 Mui goll vit a profit zo deus Michel Vacon.
 Tud deus coste ar zav-eol, o tont da foar Dreguer,
 A velo c'hoas brec'h Michel en goeen ann Traou-Meur.
 Eon ti ann nord d'ann ent bris, dirag stang ann usin
 Eno oa plassen Michel voar gornik ar jardin.
 Neus eomp den da fachan, neus bet netra domaj,
 Na kemer kos nac err-eur vit eur vugaleac'h
 Kement-ma n'eo ket eun tarch d'ar reputation
 Kals deus a verc'het iaouank n'eus bet kos gant Vacon.
 Ann hini neus gompaset ar chanson a neve
 Na neus na droug na malis eus den deus ar c'hontre
 Hag a ve Pipi Vacon ha Michel voar ma zi
 Me a gano ar chanson hep kemer fachiri P. R.